

KANTIK

ENN ENOR

Da ZANT VISANT

MERZER

A behini ar c'horf, rôet gant hon Tad Santel ar
 Pâp, **PIE IX**, da iliz ann Itron-Varia Wir-
 Zikour e Gwengamp, a zo bet digaset gant
 enor ena iliz-se, gant ann Otrou **DAVID**, Eskop
 Sant-Briek, deiz ar Pardon braz,
 pevare Gouéré 1868.



GWENGAMP

E TI P. AR GOFFIK, MOULER

1868

KANTIK

ENN ENOR

Da ZANT VISANT

MERZER

A behini ar c'horf, rôet gant hon Tad Santel ar
Pâp, **PIE IX**, da iliz ann Itron-Varia Wir-
Zikour e Gwengamp, a zo bet digaset gant
enor enn iliz-se, gant ann Otrou **DAVID**. Eskop
Sant-Briek, deiz ar Pardon braz,
pevare Gouéré 1868.



GWENGAMP

E T I P. AR GOFFIK, MOULER

1868

KANTIK

1872 1873

BEZIOU AR VERZERIEN



Dindan ar ger a Rom ha tro war dro da ger 'zo men-
gleuziou koz (*les catacombes*) e pelec'h ar Gristenien genta euz
ann Iliz en em zastume enn noz hag e kuz, evit pedi Doue,
klevet ann oferen hag ober euvrou mad. — Enn amzer ze
ar Gristenien a oa ken unanet entre-z-ho, kement en em ga-
rent en Jezuz-Krist, ma n'ho doa nemet ar memeuz speret
hag ar memeuz kalon. E kuz e rankent ober ho religion,
rag ann Impalaered euz a Rom a zifenne, dindan boan a varo,
heuilla lezen hor Zalver Jezuz-Krist. Epad ouspen tri c'hant
vloaz ar vourrevien kriz-ze ho deuz laket d'ar maro kement
a gristenien, bugaligou war barlen ho mamm, tud iaouank,
tud koz, ma voa ann douar ru gand goad ar Gristenien. —
Ar Verzerien a roe gant joausdet ho buez evit ho feiz. Tolet
vijent didrue d'al leoned, d'ann tigréd ha d'al loened gouez
evit beza dispennet e beo : darn vije freget ho c'horf gant
kribinou houarn, darn all a vije rostet war eur c'hril evel
sant Laurans, pe eskennet gant ann eskén. Ann ifern oa
kounaret, mez dorn Doue a harpe mad ann Iliz santel. Seul-
vui ma rede ar goad er c'heriou ha war ar meaz, seul-vui
e kreske ann niver euz ann dud a feiz hag a galon. Ar
Gristenien a gase enn noz d'ar menogleuziou korfou ar Ver-
zerien lazet e pad ann de, lakat a reent e pep bez eur vu-
redik euz goad ar merzer hag he hano war ar men-bez.

A viskoaz ann Iliz e deuz karet beziou he bugale marv evit ar feiz hag enoret ho relegou ; a viskoaz ive , beziou ar Verzerien, hon tadou koz dre ar feiz, zo bet eur pelerinach kaer, darempredet braz evel ma eo, e Breiz-Izel, Remengol ha Gwengam. « Em iaouankiz, e me zant Jerom, oun bet » gant va mignonet ha va c'henvreudeur, o visita e Rom, » beziou ann Ebestel hag ar Verzerien (*). »

E mengleuziou Rom zo kalz relegou Zent : hon Tad Santel ar Pâb a laka digori, a amzer da amzer, beziou ar Verzerien ha sevel euz ann douar ho relegou, pere ve kaset, dre he urz, da ilizou brudet. Pii nao, hon Tad Santel, enn deuz roet er bloavez-ma da iliz burzuduz ann Itron-Varia Wir-Zikour Gwengam korf eur bugel iaouank, **Sant Visant**, evit beza Patron ha skouer ar vugaligou. Roet enn deuz c'hoaz relegou kalz a Zent all, relegou ann ebestel, ann dok-tored hag ar Zent braz euz ann Iliz. E Gwengam zo c'hoaz kalz a relegou precious, ha dreist holl relegou Zent Breiz-Izel, roet gant ann iskibien.



(*) In Ezechiel, cap. xli. — (S. Amb., exhort. Virg. c. 2 et Ep. ad sororem, 22.) (S. Gaudent. homelia in dedicatione basilicæ.)

KANTIK DA ZANT VISANT, MERZER

WAR DON : Kalz amzer a m'euz kollet

Sinite parvulos venire ad me.

Lezit ar vugaligou da zont d'amni c'haoud.

(Komzou Jezuz-Krist enn aviel zant Vaze)

Diskennit war ar c'houlmoul, Zent koz a Vreiz-Izel,
Sant Briek, sant Kaourintin, sant Tual, sant Gwen-el,
Sant Hervé, sant Gwenole, sant Ervoan, sant Efflam,
Diskennit euz ann Envou, diskennit e Gwengam.

DISKAN

*Itron Wir-Zikour Gwengam, c'houi a bedo Doue,
C'houi bedo ho Map Jezuz evit ho pugale.*

Elez gwen ar baradoz, c'houi gant Doue karget
Da deurel evez war Breiz ha war ar Vretonet,
Deut da welt ho Rouanez, Patronez vad Gwengam,
Evel d'hoc'h eo bet krouet dibec'h, pur ha divlám.

Tavit kurunou, avel, arne, luc'hed, taran,
Ha te, mor braz o krozal, tao ha na lavar man!...
Tud koz, iaouank, bugale, a ia leiz ann henchou,

Da Wengam, enn eur gana d'ar Werc'hez pedennou.

Heol alaouret ar mintin, savit euz ar goabren
Da belerined Gwengam, digasit sklerijen,
Ha c'houi, labousedigou, kanit holl meuleudi,
E koajou Breiz da Zoue, ha d'ar Werc'hez Vari.

Pelerined Breiz-Izel, diredit da Wengam,
Deut gant feiz ha karante, deut da welet ho Mamm,
'Nn Itron-Vari Wir-Zikour, devez he fardon braz,
Hag o pezo digant-hi, grasou ha grasou c'hoaz.

Tud ankeniet ha tud paour, c'houi holl war ann douar,
A zo beuzet ho kalon, enn eur mor a c'hlac'har!...
E Gwengam hoc'h euz eur vamm, Mamm Jezuz, Mamm Doue,
Digor he diwrêc'h gant-hi, c'hortoz he bugale.

Gant hon Tad santel ar Pâp, eur Zant zo digaset,
Da iliz Mamm Gwir-Zikour, **Sant Visant** eo hanvet;
Ograou ha kloc'h braz Gwengam, sonit ha sonit drant,
Sonit ho toniou kaera, sonit da zant Visant.

CANTIQUE DE SAINT VINCENT, MARTYR

SUR L'AIR : J'ai perdu beaucoup de temps

Sinite parvulos venire ad me.

Laissez les petits enfants venir à moi.

(Paroles de Jésus-Christ dans l'Évangile selon saint Luc.)

Descendez sur les nuées, vieux Saints de Bretagne,
Saint Brieu, saint Corentin, saint Tugdual, saint Guen-el,
Saint Hervé, saint Guénolé, saint Yves, saint Efflam,
Descendez des Cieux, descendez à Guingamp.

REFRAIN

*Notre-Dame de Bon-Secours de Guingamp, vous prierez Dieu,
Vous prierez votre Fils Jésus, pour vos enfants.*

Anges blancs du paradis, chargés par Dieu de veiller
Sur la Bretagne et sur les Bretons,
Venez voir votre Reine, la bonne Patronne de Guingamp,
Comme vous elle a été créée, sans péché, pure et immaculée.

Faites silence, tonnerres, vents, orages, éclairs, tempêtes,
Et toi grande mer qui mugis, silence et ne dis mot !...
Des vieillards, des jeunes gens, des jeunes filles, des enfants rem-
plissent les routes, allant à Guingamp,
En chantant à la Vierge des prières.

Soleil doré du matin, sors de la nuée,
Aux pèlerins de Guingamp, donne ta lumière :
Et vous petits oiseaux, chantez tous des louanges
Dans les bois de Bretagne, à Dieu et à la Vierge Marie.

Pèlerins de Bretagne, accourez à Guingamp,
Venez avec foi et amour, venez voir votre Mère,
Notre-Dame de Bon-Secours, le jour de son grand pardon,
Et vous recevrez d'Elle des grâces et encore des grâces.

Gens affligés et pauvres, vous tous sur la terre
Dont le cœur est noyé dans un océan de douleur,
Vous avez à Guingamp une Mère, la Mère de Jésus, la Mère de Dieu
Elle a les bras ouverts; elle attend ses enfants.

Notre Saint Père le Pape a accordé le Corps d'un Saint
A l'Eglise de la Mère de Bon-Secours, Saint Vincent est son nom,
Orgues et grande cloche de Guingamp, sonnez, avec joie,
Sonnez vos plus beaux airs, sonnez à Saint Vincent.

Itron-Vari Wir-Zikour, Patronez Breiz-Izel,
Digemerit enn ho ti Sant Visant, ho pugel,
Enn ho ti m'a Zent koz Breiz, kalz meurbet a Zent braz,
Enn ho ti 'm'a Dukez Breiz. Franseza a Amboaz.

Sant Visant oa eur bugel, a zaouzek vloaz oajet,
Eur bugel enn oad dister, gant ann holl oa karet;
He zeveriou a gristen pen-da-ben a c'heulie,
Evel eun El oa divlam he galon he ene.

Douja re d'he dad, d'he vamm 'vel ar Mabik Jezuz,

Diski re lezen Doue : he feiz a oa nerzuz :
Grit evel-d-han, bugale, roit ive levenez
Enn eurusdet, er glac'har d'ho tad ha d'ho mamm gez.

Allaz! er bed-ma zo kaon, ha daelou ha glac'har!.....

Koz ha iaouank 'zoug'ho c'hroaz war lein Mene Kalvar :

Visant, ar bugelik paour, evit ar feiz 'varvo,
Dre urz 'nn impalaer tirant, he voad holl a skuillo.

Ann impalaer didruez da Visant a ordren

Dilezel ar gwir Doue, Doue ar Gristenien,

— « Nan, 'me Visant, me varvo, me a varvo fidel,
» Fidel d'amm Mestr, d'amm C'hrouer, d'amm Doue eternal! »

Ann tirant a c'hourc'hemen flastra d'ezhan he ben,

Ha Visant enn eur vervel a lavare laouen :

— « Ma Jezuz, gwir vap Doue, ma Jezuz, c'houi garan,
» Jezuz maro evid-oun, evid-hoc'h e varvan! »

Maro eo ar bugelik!..... da noz ar Gristenien

A gasaz he gorf santel da veziou 'r verzerien;

Abaoe meur a gant vloaz, chomet eo bet eno,

Gant Merzerien all 'vel-d'-han, evit ar feiz maro.

Gant hon Tad santel ar Pâp, PIUS NAO he hano,

Korf ar bugel sant Visant zo savet ac'hano

Ha digaset da Wengam, da iliz Mamm Doue,

Evit beza sant Patron ha skouer ar vugale

Deuit da bedi ar Werc'hez, c'houi tadou ha mamou,

Deuit da bedi sant Visant, 'vit ho pugaligou;

Daoulinet 'nn iliz Gwengam, pedit a wir galon,

Evid Breiz ha tud ho pro, evit ann anaon.

Itron Wir-Zikour Gwengam, c'houi a bedo Doue,

C'houi bedo ho Map Jezuz evit ho pugale.

Notre-Dame de Bon-Secours, Patronne de Bretagne,
Recevez dans votre maison Saint Vincent, votre enfant,
Dans votre maison se trouvent les vieux Saints de l'Armorique,
Et avec eux beaucoup d'autres grands Saints, ainsi que la Du-
[chesse de Bretagne, Françoise d'Ambroise.

Saint Vincent était un enfant de douze ans
Et quoique jeune encore était aimé de tous,
Parce qu'il suivait de point en point les commandements de Dieu
Parce que son âme et son cœur étaient blancs comme la neige.

Il obéissait à son père et à sa mère, comme l'enfant Jésus à ses
[parents,
Il apprenait avec amour la loi de Dieu : sa foi était robuste ;
Suivez son exemple, Enfants ; donnez aussi de l'allégresse,
Dans le bonheur comme dans le malheur, à votre père et à votre
[pauvre mère.

Tout homme a dans cette vie, peine, angoisse et douleur ;
Lourde est la croix à porter au sommet du Calvaire :
Vincent, le pauvre enfant, mourra pour la foi,
Un empereur tyran fera verser tout son sang.

Cet empereur sans pitié commande à Vincent
De renier le vrai Dieu, le Dieu des Chrétiens :
— « Non, répondit Vincent, je mourrai, je mourrai fidèle,
» Fidèle à mon Maître, à mon Créateur, au Dieu Eternel. »

Le tyran ordonne de lui briser la tête,
Et Vincent, en mourant, disait avec joie :
« Mon Jésus, vrai fils de Dieu, mon Jésus, vous que j'aime
» Jésus, mort pour moi, pour vous je meurs !.... »

Il est mort le pauvre enfant !.... — Le soir les Chrétiens
Portèrent son corps saint aux tombeaux des martyrs.
Il y est demeuré pendant plusieurs siècles,
Avec les reliques d'autres martyrs, comme lui morts pour la foi.

Notre Saint Père le Pape PIE IX fit enlever des catacombes
Le corps de l'enfant martyr, Saint Vincent,
Le fit envoyer à Guingamp, à l'Eglise de la Mère de Dieu,
Pour devenir le saint Patron et le modèle des enfants.

Venez prier la Vierge, vous pères et mères,
Venez prier Saint Vincent pour vos petits enfants ;
Agenouillés dans l'Eglise de Guingamp, priez de tout cœur,
Pour la Bretagne et les Bretons, priez pour les trépassés !....

*Notre-Dame de Bon-Secours de Guingamp, vous prierez Dieu,
Vous prierez votre Fils Jésus, pour vos enfants.*

PEDEN D'ANN ITRON-VARIA WIR-ZIKOUR

Kendalc'hit ar feiz e Breiz, Patronnez Breiz-Izel,
Roit nerz d'emp enn hor poanion ha pa rankimp mervel,
Itron Wir-Zikour Gwengamp, ma zaimp d'ar baradoz,
Gan-e-hoc'h da welet Jezuz, hor Zent hag hon tud koz!

I.-P.-M. AR SKOUR,

Barz ann Itron Varia-Remengol.

PRIÈRE A N.-D. DE BON-SECOURS DE GUINGAMP

Conservez la foi en Bretagne, Marie, notre Patronne,
Fortifiez-nous dans nos souffrances, et lorsqu'il faudra mourir
N.-D. de Bon-Secours de Guingamp, afin que nous allions
Avec vous au paradis, voir Jésus, nos Saints et nos pères.

J.-P.-M. LE SCOUR,

Barde de Notre-Dame de Rumengol.

Hon bennoz d'ann hini en deuz grêt ar c'hantik kaer-mañ
ha da gement-hini hen kano.

† AOGUSTIN

Eskop St'-Briek ha Treger.



